

AN HINI GOZ

The musical notation consists of three staves of music in common time with a key signature of one sharp. The lyrics are written below the notes:

An hi-ni goz eo va dous An hi-ni goz eo
sur Ha koulskoude war a welan an hi-ni
yaouank ar vraoan.

DISKAN

An hini goz eo va dous,
An hini goz eo sur!

1

Ha koulskoude, war a welan,
An hini yaouank ar vraoan.

2

An hini yaouank a zo koant
An hini goz he deus arc'hant.

3

Me ne dan morse d'ar marc'had
Na ro d'in-me gwerz boutailhad

4

An hini goz am c'hondou mat
An hini goz a zo d'am grad.

5

Ha koulskoude ebarz e kér,
An hini yaouank a gerer.

6

An hini yaouank zo ker sounn,
An hini goz eun tammig kroumm.

7

An hini yaouank zo lijer
An hini goz a zo pounner!

8

An hini goz he deus bleo gwenn
An hini yaouank bleo melen.

9

An hini goz liou radenn sec'h,
An hini yaouank liou an erc'h.

10

Liou an erc'h eo hag hi ker yen
Ma ne zell ket ouzin hepken.

11

Ha koulskoude, n'ouzoun perak,
Va c'halon 'ra tik-tak, tik-tak!

12

Tik-tak a ra va c'halon baour
Pa 'z an da skei war doull an nour.

13

Tec'h alese, tec'h kuit, tec'h pell ;
An hini goz a zo kant gwell.

14

An hini goz a zo kant gwell
Ne ra ket tailhou dimezell.

15

Diaket an dimezelled,
Diaket e teir rann ar bed.

16

Dimezelled ne reont bepred
Nemet goab eus ar Vretoned

17

Pa daolan dourn war benn he glin,
An hini goz a c'hoarz ouzin.

18

An hini goz 'zo Bretonez,
An hini yaouank 'zo Gallez.

19

Fae eo ganen gand ar Gall brein
Gant kroc'hen an diaoul war e gein.

20

Fae eo ganen gand ar C'hallez
Ganti karnou en he botez.

21

Goude tri dez e skuiz pep den
Gant glao, avel ha merc'h estren.

22

Ma komzit a vriedelez
Komzit d'in eus eur Vretonez.

23

Ne rafen van pa ve laret
Eo ar Vretonez grac'hellet.

24

Vitan da vez a grac'hellet
Eun aval blas fall n'en deus ket.

25

Bezet droug gant neb a garo
Trouc'het an eost, dournet e vo.

26

Bezet droug gant neb a garo,
Va dous ha me ni eureujo.

27

Ni gousko en eur gwele kloz,
War ar pell fresk, bep noz, bep noz.

28

Ha pa ve ker koz hag ar bed
Ganen e vez o gwalennet.

